

AVEL HON LENNEGEZH O C'HWEZHAÑ (2)

« Ul labour n'eus ennañ, moarvat, nemet un nebeud pezhioù dibabet a-douez kalz. Setu labour Bleimor, a skrive hep goulenn ha plijout a raje d'unan bennak, evitañ e-unan, dre ma oa re leun e galon, dre ma oa ret dezhañ skrivañ, evit sevel gant gerioù un ti da divliadennoù e ene. Evit ar wezh kentañ en hol lennegezh, ez eus bet kavet ur barzh da lakaat e holl ene en e varzhonegoù. »  
Sede a skrive Roparz Hemon, bloaz a-raok ganedigezh *Gwalarn*, diwar-benn barzhoniezh Yann-Bêr Kalloc'h. Hemañ a oa aet gant mindrailh ar brezel lakaet da vras... gant ar bolitikourien. Aet da vro ar re dall, ha chomet e varzhoniezh war e lerc'h. Ur prof kaer ha talvoudus dimp.  
Bezeta a vezo, Roparz Hemon a soñjo en kement-se pan divizo embann ar c'hentañ barzhoneg lakaet dezhañ siell *Gwalarn* : *Ur wreg er skeud e traoñ an ti...* Ur barzhoneg gant Yann-Eozen Jarl, yaouankikoc'h evit ar Roparz. O daou a oa bet darempred etreze en tu Pariz pan oant o daou eno. Ar Brestad, agregad saozneg, hag ar Santad-Nouga aet gant Politeknik : an eil o kenteliañ egile war ar brezhoneg. Ul liamm denel, yezhel ha lennegezh. Gant menegiñ Sant-Nouga ho po divinet sur e oa ul liamm denel all a-berzh ar Yann-Eozen : Yann-Vari Perrot a oa kure eno ha n'eo ket souezh e voe levezonet hon paotr Politeknik gantañ.  
Ur stil dezhañ e-unan en devoa Yann-Eozen Jarl. Gweledigezh ar relijion, hiraezh, melkoni ar vuhez a-wezhioù :

Ur wreg er skeud e traoñ an ti,  
Mor a anken ouzh he hentiñ ;  
Un dar lemm-bev war he jod glas,  
Rak rec'harvder a c'houzañvas  
En amzer-mañ.

Davet an Neñv, Krist ar voger  
'Viti a sav e zivrec'h hir...  
Ur c'hleze bras, noazh ha ponner,  
Newazh a strink flammder e zir  
En amzer-mañ.

Pe ner eta a emgannas  
Evit difenn ur vin ken kaer ?  
Ha marv eo neb he c'haras  
Pa na zeu mui war-dro he c'haer  
En amzer-mañ ?

ner = priñs

N'he deus gwelet ar plac'h hep par  
Hinou skinus ar c'hala-mae ;  
War he zal gwenn a-vec'h e par  
Bannoù argant heol ar beure  
En amzer-mañ.

Plezheta o deus ar mintinioù  
Gant sklaerder hir he blev melen ;  
C'hoarzheta en deus pers an ebrou  
Dre zonder boull he daouc'hourren  
En amzer-gent.

Skuilhet o deus ar sterennoù  
Skleur bev he boug, 'vel ur c'hlizhenn ;  
Nijet o deus an aveloù  
Gant heson skañv war he c'herc'henn

En amzer-gent.

He daoulagad dispont digor  
N'int bet gant den biskoazh saotret ;  
He blev dispak da went ar mor  
N'o deus douget ere ebet.  
En amzer-gent.

Ha ne spinas pok an estren  
He beg ken gwerc'h ha stivell-zour ;  
Ferv e voe evit gorren  
Glander dinamm hec'h ene flour  
En amzer-gent.

Gwa te, Merc'h kaezh ! ar mestr diwir  
A ren warnout a venn mougañ  
An teñzor splann a zo ez mir :  
Ene Kornôg, ene gwellañ  
An amzer-mañ.

Met ne dalc'has ket ar Yann-Eozen gant ar skrivañ (ar skrivañ embannet ha moulet da vihanañ), war-  
bouez un draig bennaket. Kalz war-lerc'h, hanter-kant vloaz war-lerc'h ec'h adlemmas e bluenn akuit  
da sevel barzhonegoù all, evel amañ : Tarzh e-tal ar bez.

Yen ar maen en-dro dit ;  
Ponner an douar war da varlenn ;  
Leizhder ar pri a veuz da izili ;  
D-teñval eo ar gouloù a-us d'az taoulagad ;  
Kalet dougenner da benn balc'h ;  
Etre da vizied e kren da chapeled ;  
Â va bugel, a-led, dirazon  
e kavell ar c'heler...  
Hag holl garantez va c'halon a chom berr  
da zegas dit un netra eus sklaerder an heol,  
ur mann eus tommder an deiz,  
un elfenn vihan a vuhez.

En aner gervel a ran da anv...

An avel reut a ambroug davedout  
ar sioulded c'hlac'harus  
a yud em c'hreiz  
gant fru an daeroù c'hwerv,  
â va bugel  
kousket didu er vered digenvez...

*De profundis clamavi at te domine...*

Va Doue,  
ro dezhañ frealz, peoc'h ha sklêrijenn.  
Ha klevout a ris ur vouezh eus an neñv :  
*Beati mortui qui in Domino moriuntur*  
tav da hirvoud, ped ;  
Tra strafuilh ha keuz ar bez  
gwel

en e c'hoursav dic'hourfenn  
ene gwenvidik da vogel  
a gan hag a drid el levenez  
ouzh treid an Drugarez

*...Speravit anima mea in Domino ;  
A custodia matutina usque ad noctem.*

*Requiem aeternam dona ei Domine  
Et lux perpetua luceat ei...*

Ret eo lenn ar poltred savet gant Ronan Huon evit kompren piv 'oa ar barzh-se. Ur poltred leun a gizidigezh, ur poltred gwirion ha doujus.  
Gweledigezh, gwir eo, hiraehzh, gwir eo, met ivez kizidigezh ha glac'har. Er barzhoneg diwezhañ-mañ emañ o ouelañ d'e vab falc'het gant an Ankoù. Diardoù, noazh e divliadennoù. Evel ur c'hensturier da Yann-Bêr Kalloc'h. Piv a lâro dimp petore broadelezh zo gant ar glac'har diharz ? Piv a lâro dimp ar gerioù a lako hon glac'har-ni da devel ha pa vefe un eilenn bennak en hon buhez ?  
Glac'har, ranngalon, c'hoant da darzhañ...  
Ha trugarekaat da gement Yann-Eozen bet o krediñ kinnig dimp, lennerien sebedennet, un ti a divliadennoù evit hon eneoù, evel ma skrive Roparz Hemon.

Herve Bihan

Levrlennadur

Ronan Huon, Yann-Eozen Jarl (1902-1985), Al Liamm, Niv. 233, 1985, pp. 331-334.

Yann-Eozen Jarl, Ur wreg er skeud e traoñ an ti..., Gwalarn, Niv. 1, 1925, p. 3.

Yann-Eozen Jarl, Tarzh e-tal ar bez, Al Liamm, Niv. 230-231, 1985, pp. 171-172.

Gwendal Denez, Barzhoniezh maread *Gwalarn* : modern pe get ?, Klask, Niv. 3, 1996, pp. 107-114.

Roparz Hemon, Barzhoniezh, Ur Breizhad oc'h adkavout Breizh, Al Liamm, 1972, pp. 80-89.  
[embannet en 1924 da gentañ]